

Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

Ar micherour o tiskuiza,  
A gan eur c'hantik da Varba,  
Hep en em glem euz he vicher  
E kan evel an alc'hueder.

Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

Astennet gant nerz ar c'hlenved  
Var eur gouele kriz ha kalet,  
Ar c'hlanvour e kreiz he boaniou  
Dezhi a gass e bedennou.

Meulomp leun a joa  
Meulomp Santez Barba.

I I I

Santez Barba, dirak Doue,  
Bezit sonj euz ho pugale.  
Diouz ar gurun hon dioualit.  
Diouz an tan, ar maro subit.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba

C'houi zo, en Env, hor patronez !  
Dalc'hit ar feiz en hor parrez.  
Goulennit ma chomomp bepred  
Gwir Vretonnet pennou kalet.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba

Hon tud koz o deuz ho karet.  
Hag e pep amzer ho meulet.  
Ni ho pedo, mintin ha noz,  
Evit mont holl d'ar barados.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba,

J.-M. DERRIEN.

Quimper 8 juillet 1891.

PERMIS D'IMPRIMER :

F. OLLIVIER, Vic. Gén.

Morlaix. — Imp. A. LE GOAZIOU.

8N2-1-003

KANTIK

# SANTEZ BARBA

E BERRIEN

Ton anavezet.  
Chant des Marins.

DISKAN

Ni ho salud gant levenez,  
Ni ho salud, hor patronez.  
C'houi ro deomp ho relegou,  
Ni ro deoc'h hor c'halonou.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

I


Ar Zantez- ma zo pennaerez,  
Leun a vadou, leun a zanvez.  
Mes he zad a zo eur paien,  
Enebour bras d'ar gristenien.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

En he balez an Idolou  
A reseve kals enoriou.  
Mes gant Doue sklerijennet  
Barba dezho ne zouje ket.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

En despet d'he zad kounaret  
Ar verc'h iacuank zo badezet.  
Tridal a ra en he frizon,  
Seder hag eurus he c'halon :  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

Diskar a ra an Idolou,  
Ho bruzuna gant he boutou :  
Ra vezoc'h dre holl distrujet  
Ha gant an holl dud disprijet !  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

Pa vel en he di diskaret  
An Idolou ganthan savet,  
Tad hor zantez ne c'hel kousket  
Ken a vo he verc'h kastizet.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.



Evel eur bleiz ho iudal  
E saillas var Barba raktal.  
Dre an drez, ar spern he stlejas  
Ha dindan he dreid he bressas.  
Meulomp leun a joa  
Meulomp Santez Barba.

O va zad ker, eme Varba,  
Ar galloud o peuz d'am laza.  
Da Jesus, d'he lezen zantel  
Me vo fidel betek mervel.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

Perak, va merc'h, ne zentit ket  
Ous al lezen am eus douguet,  
Ha perak chomp hep adori  
Doueou bras Nikomedi ?  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

Biken, biken n'ho adorin,  
Na dirazho ne zaoulinin.  
Va flijadur a vo diskar  
Idolou mud, dall ha bouzar.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

He zad neuze he chadennas,  
Da di ar barner e c'hassas,  
Evit gallout dre dourmanchou.  
Mouga buan he c'hredennou.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

Ar barner-se, pa he guelas,  
Gant dousder outhi a gomzas :  
D'hor lezen doujit a nevez,  
Hag o po enor ha danvez.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

Dalc'hit, dalc'hit oc'h enoriou,  
Dalc'hit deoc'h oc'h holl madou  
Mari da Vam, Jesus da Roue.  
Setu eno va holl leve.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

Kerkent he c'horf zo dispennet  
Gant kribinou hir ha kalet.  
Ar verzeret a zo euruz  
Da c'houzant evit he Jesus.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

An tyrant nec het gant Barba  
A roaz urs d'he dibenna.  
Ar zantez ne ra van ebet,  
A d'ar maro dispount a red.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

O tra euzus da lavaret  
Ha diez da veza kredet !  
Piou zibenno Santez Barba ?  
He zad a c'houlen he laza.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

Kerkent he dorfet achuet  
An tad kriz a zo kastizet.  
Eun tarz-kurun, spountuz ha kre  
Her pulluc'has, abers Doue.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

## I I

Barba zo karet gant pep den.  
Mes sellit ouz parrez Berrien !  
He chapel zo huel savet,  
Essoc'h d'an holl dud da velet.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba

Brudet e bed ar C'hoad bras,  
Ar C'hoad Nevez vo muioc'h c'hoaz !  
Rak e leac'h ar chapellik  
E zeuz eur chapel pinvidik.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

Ama an holl a zo dezhi,  
An holl o deuz fizans enni.  
Ar bugelik en he gavel,  
An den koz o vont da vervel.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

Ar marc'hadour, o veachi,  
Bemdez en deuz sonj d'he fed,  
Ha pa vez distro d'e barrez  
E red da chapel ar Zantez.  
Meulomp leun a joa,  
Meulomp Santez Barba.

Al labourer, en he zouarou,  
Kroumet dindan e veac'hchou,  
Dingant Barba c'houlen sikour  
Hag he bennoz var he labour.